

D'ar 24 a viz Mae

- Er I^{añ} kantved, **sant Manahen**, "*mignon a-vihanik d'an tetrark Herodez*" (Ob 13,1), e voe profed ha doazhour en Iliz Antiokeia, war un dro gant Barnaba, Simon lesanvet Niger ha Loukioz ar C'hirenead.

- War-dro 450, **sant Visant Leriñs**, manac'h ha beleg. Hag eñ skrivagner ha doueoniour, e lakaas war wel keal diorreidigezh ar feiz.

- E 592, **sant Simeon ar Peulour, ar Yaouaer**, beleg ha penitiour.

Bevañ a reas kludet war ur peulvan e kendiviz gant ar C'hrist hag an aeled, hag eñ lakaet barrek da skarzhañ an diaouled.

- **Gouel Santez Mari Skoazellerez ar Gristenion**, kehelet e Sheshan e Shangai. *Devezh pediñ evit Iliz Bro-Sina* bet diazezet gant ar Pab Benead XVI e 2011.

- War-dro 304, e Naoned, da-geñver heskinadegoù Maximanus, merzherenti **ar sent Donasian ha Rogasian**, lesanvet "*Bugale Naoned*".

Bez' e oant eus metoù an uhelidi Galian-roman ha na oant ket bet kristenaet c'hoazh. Donasian avat a voe gounezet d'ar feiz ha badezet gant sant Similian eskob Naoned. E vreur Rogasian a oa katekizad c'hoazh pa voent tamallet o daou en abeg d'o feiz da brefed Galia, deuet betek Naoned. Harzet e voent ha dre ma embannjont dichek e oant kristenion e voent chadennet ha taolet er c'harc'har. Kondaonet d'ar marv, e voent lakaet war ar marc'h-koad, toullet o c'horzailhenn a daolioù goaf ha dibennet.

- En Iwerzhon, **santez Dervilez**, maouez santel.

D'ar 25 a viz Mae

- Er I^{añ} kantved, **santez Mari Kleofaz pe Jakobe**, ar *berlouzaouerez*, diskiblez an Arloz.

Ganet, hervez an hengoun, eus eil dimeziñ santez Anna gant Kleofaz, breur Jozef, e vefe Mari Jakobe gwreg Alphe, ha neuze mamm Jakez minor, Jozef ar Yon, anvet Barsabaz, Simon ar Greder ha Jud.

- C'hoazh er I^{añ} kantved, **santez Sara**, matezh Mari Salome ha Mari Jakobe, ur vaouez du a ouenn anezhi. Ganto e vije erruet er bProvensa lec'h ma vez kehelet.

- War-dro 137, merzherenti **santez Sofia** - he anv o talvezout *Furnezh* - genidik eus Bro-C'hres, intañvez ur senedour eus Milano, bet lakaet d'ar marv e Roma war un dro gant he merc'hed **santez Pistis** - pe *Vera* e slaveg o talvezout *Feiz* - santez **Elpis** - *Nadieжда* e slaveg o talvezout *Goubeizh* - ha **santez Agape** (*Lioubova* e slaveg o talvezout *Karitez*) a zougas testeni divrall eus o feiz dirak an impalaer Hadrian, daoust d'o oad tener hag int kalonekaet gant o mamm santel.

Santez Sofia a vez lidet e Bro-Alamagn d'ar 15 a viz Mae, en Elsas ivez hag e Lotaringen, da heul Sent ar Skorn ha lesanvet e vez *Die Kalte Sophie*.

- E 735, e Jarrow (Durham) e Bro-Saoz, **sant Beda pe Aertzren** (Kb. Aerddren), beleg, manac'h beneadat, Doazhour eus an Iliz, *Hanezour ar Vrezhoned*.

E vuhez hir a ouestlas d'ar studioù war Dadoù an Iliz, war an Istor ha war vuhez ar sent.

- E 1085, e Salerno en Italia, distro da Zoue **sant Gregor VII**, pab. Ouzh Dug Breizh e zezanvas ar vro evel "*an hini gentañ e-touez ar broadoù bet merket gant Doue evit difenn ar gristeniezh*."

Ganet war-dro 1015/1020 e Bro-dToscana, Ildebrando Aldobrandeschi de Soana a voe manac'h e Roma a-raok tremen tri bloaz e Cluny gant sant Hugues da abad. Distro da Roma e voe dilennet abad Sant-Paol-er-maez-Kêr gant ar pab elzasat Leon IX ma voe e guzulier. Diuzet e-unan war Gador Sant Pêr e 1073 dindan anv Gregor VII e lezas e anv d'an adreizhidigezh c'hregoriat. Stourm a reas ouzh Herri IV impalaer germanat a reas neuz da blegañ e Canossa hogen e rankas Gregor mont d'an harlu e Salerno e Campania lec'h ma varvas.

- E 1607, e Firenze, **santez Mari-Madalen Pazzi**, gwerc'hez, karmeziadez. Ren a reas he buhez kuzhet er C'hrist er bedenn hag en emziouer o pediñ start evit adreizhidigezh an Iliz ha grataet a zonezonoù liesseurt a-berzh Doue.

- E 1865, e Pariz, **santez Madeleine-Sophie Barat**, ganet e Joigny e Burgondia, diazevourez Kevredigezh Kalon Sakr Jezuz.

- E Bro-Skos, e 717, **sant Dongad**, Iwerzhonad, abad enez Iona.

- E Breizh, e 1689, **ar bac'hiadez Janed Kelen**, diazevourez leanezed an Tad Peurbadel e Gwened.

D'ar 26 a viz Mae

- Er bloaz a c'hras 189, e Roma, distro da Zoue **sant Eleuter**, pab.

Genidik eus Bro-C'hres, e voe diuzet da bab e 175, da vare an impalaered Marcus Aurelius ha Commodus.

Degemer a reas sant Ireneos evit divizout gantañ a-zivoud disivoud ar beleg Montanus eus Frijia.

- E 1595, e Roma, ganedigezh en neñvoù **sant Fulub Neri**, beleg, diazevour an Oratorio.

Hag eñ genidik eus Firenze, e teuas da Roma lec'h ma voe person Sant-Yann ar Firenziz. Eno e tiorreas e oberenn evit ar yaouankizoù m'en em eile enni ar c'henteloiù speredel, ar c'hanoù, an oberennoù a garitez ha lec'h ma skedas e garitez, e eeunded avielek, levez e galon en ur gred dreist e gwazerezh Doue. Kenvreuriezh Beleion an Nevedenn a gendalc'h an doare abostolerezh-mañ war e lerc'h.

- En Iwerzhon, VI^{vet} kantved, **sant Bic'han**, kar da sant Koulmkell, abad Cill Bheagáin.

- E Breizh, e 1681, distro da Zoue ene **an Tad Jakez Douit**, lesanvet *Jourdan*, beleg eus beleion Sant Yann Eudes, rener kloerdi Roazhon, donezonet kaer evit ren an eneoù, marvet e-doug ur mision a brezege en Entraven e Bro-Roazhon.

- Hervez hengounioù Breizh-Veur, deiz penn-bloaz **badeziant ar roue Lucius** gant ar sent Fagan ha Duvian bet kaset davetañ gant ar pab Eleuter.

D'ar 27 a viz Mae

- War-dro ar bloaz a c'hras 311, e Dorostor e Media, hiziv e Bulgaria, merzherenti **sant Jul**.

Ezvrezeliad war e leve e oa pa voe harzet ha kinniget d'ar barner Maksen. Dirazañ e embannas e feiz er C'hrist hag e heug ouzh an idoloù, neuze e voe dibennet.

- Er IV^{re} kantved e Roma, da vare heskinadeg Diocletianus, merzherenti **sant Restitud**. Dre ma savas enep kehelerezh an idoloù e voe skourjezet betek ar marv ha sebeliet war-ribl ar *Via Nomentane*.

- War-dro 604, e Bro-Saoz, **sant Eosten a Gêrgent**, eskob, avielour ar Saozon.

Hag eñ manac'h beneadat, e voe kaset a-gevret gant menec'h all war intrudu ar pab sant Gregor Veur da avielañ ar Saozon. Un degemer mat a voe graet dezhañ gant ar roue Ethelberzh hag a oa dimezet gant ur gristenez, merc'h-you da Glodwig I^{añ} a Vro-C'hall. Dre e abostolerezh e c'hounezas d'ar feiz prestik goude ar roue a c'houlennas ar vadeziant hag e kanttroas ul lod mat eus ar bobl. Diazezañ a reas meur a sez eskob.

- E 680, **sant Hildeverzh**, eskob Melda (Meaux) e Bro-C'hall.

Ganet nepell diouzh Hébécourt en eskobiezh Ambianos (Amiens,) e voe fiziet gant e dad e sant Faron, eskob Melda, ha desavet gantañ hervezh kenurzh ar vuhez vanac'h. Bez' e voe warlerc'hiad e vestr war sez Melda.

- E 1050, **sant Olier pe Liber** (Liberio), manac'h e Ancona.

Hervez lod e teufe eus Armenia, hervez lod all e vefe eus Dalmasia. En em santelaat a reas o heuliañ reolenn sant Benead.

- E Kembre, er VII^{vet} kantved, **santez Melangell**, penitiourez hag abadez e Pennant Melangell. Gwarezourez ar gedon eo dre ma kavas unan anezho repu en he mantell.

- En Iwerzhon, **sant Kellin**, eskob.

D'an 28 a viz Mae

- E 576, distro da Zoue ene **sant Jermen**, abad ha diazeour, eskob Pariz.

Da gentañ abad Sant-Siforian Autesiodurum e voe diuzet da eskob Pariz e 556. Goulenn a reas digant ar roue Childeberzh I^{añ} diazezañ ur manati a gemeras diwezhatoc'h e anv: Saint-Germain-des-Prés. Skrivañ reas lizhiri a-zivout an Deved Gallikan.

- E 936 e Kergustantin, **sant Andreu Salos** pe **ar Foll**. Da gentañ sklav e servij un uheliad eus lez an impalaer e voe dieubet gant e vestr hag e vevas evel ur *Foll er C'hrist* dismegañset ha goapaet.

- E Breizh, e 1340, **sant Joran** (Gl. Jorand), beleg ha penitiour. Ganet e Gouanac'h e Bro-Dreger, e voe beleget e manati Sant-Judog e Pederneg, nepell diouzh Gwengamp, hag e vevas e Ploueg-Pontrev lec'h ma vez miret e vez er chapel gouestlet dezhañ.

- En Iwerzhon, **santez Cummania** – a vefe Kommanez e anv e brezhoneg - maouez santel.

D'an 29 a viz Mae

- E 347, **sant Maksimin**, eskob Treveror (Trèves), feizvonnour. Kevarc'het e voe gant sant Jerom evel "*unan eus kalonekañ eskibion e amzer.*"

Genidik a Vro-Aquitania evel e vreur sant Jovinus, ez eas da dTreveror a oa kêrbenn impalaeriezh ar C'hornôg hag e voe diuzet da eskob e 325, war-lerc'h sant Agriculus. Difenn a reas ar reizhkredenn enep disivoud Arius hag e roas degemer da sant Atanaz a oa bet kaset d'an harlu gant impalaer ariat Kêrgustantin. Skarzhet d'e dro e varvas e Poatie.

- E 1202, er Galabria, **ar gwenvidig Joakim Fiore**, abad, meneget e goueler Citeaux. Lezet en deus oberennoù niverus, en o zouez al *Liber Figurarum* a awennas Dante pa skrivas an *Divina Comedia*.

Genidik eus Calabria, e voe da gentañ floc'h e lez roue Sikilia a-raok mont da vanac'h en abati kisterkiat Sambucina. Anvet abad Corrazzo e 1177, en em dennas goude ur pennadig evit ren ur vuhez a benitiour nepell diouzh an abati a-raok en em staliañ e San Giovanni in Fiore gant un nebeud keneiled ma skrivas evito ur reolenn a voe darbennet e 1196 gant ar pab Selestin III.

- E 1978, e Castel Gondolfo, distro da Zoue ene **sant Paol VI**, pab.

Ganet d'ar 26 a viz Gwengolo 1897 e Lombardia, e voe urzhiet Giovanni Battista Montini d'an 29 a viz Mae 1920. Arc'heskob Milano e 1954, e voe krouet kardinal e 1958 ha dilennet da bab d'an 21 a viz Mezheven 1963. Kefredour, lemm e spered, uvel, emzalc'hek ha kuñv, kourtezius-meurbet, e voe ar pab kentañ o veajiñ dre ar pemp kevandir. Kas a reas da benn goursenez Vatikan II bet kentradet gant e ziagentour sant Yann XXIII.

- E Kernev-Veur, er VI^{vet} kantved, **santez Berian**, gwerc'hez, Iwerzhonadez.

- En Iwerzhon, **santez Bruinseach**, maouez santel.

D'an 30 a viz Mae

- Er IV^{re} kantved, e Kaezaria Kappadokea, **sant Bazil ha santez Emilia**, priedoù santel, kerent sant Bazil Veur, sant Gregor Nys ha sant Pêr Sebast, eskibion, santez Makrina ar Yaouaerez, gwerc'hez. Forbannet da vare an impalaer Galerius Maximianus, e rankjont bevañ e gouelec'h ar Pontos. Goude an heskinadurioù e varvjont er peoc'h, eñ e 349 hag hi e 372, o lezel o bugale hêred o briwerc'hioù.

- E 406, **sant Izaag ar Siriad**, manac'h.

Da gentañ penitiour e gouelec'h Siria, ez eas da gKêrgustentin lec'h ma voe kuzulier an impalaer Teodoz. Da-geñver enkadenn Arius a c'houllonderas ar manatioù, ec'h adsavas-eñ meur a gumuniezh. Dre fazi e savas ur pennadig enep sant Yann Grizostomoz en doa treuzkomprenet.

- E 727, distro da Zoue ene **sant Huberzh**, eskob Tongeren ha Maastricht, Patrom an hemolc'herion.

Hag eñ dug Akwitania, dimezet gant Floribanna, merc'h ar roue Dagoberzh I^{añ} a Vro-C'hall, e rene ur vuhez a blijadur. Ken gwrac'h e oa gant an hemolc'hiñ ma ne c'hellas ket mirout outañ da redek warlerc'h ur c'harv da Wener ar Groaz. Hogen e welas ur groaz skedus etre brankoù al loen c'harv. Diwar-se e kemmas buhez hag ez eas da vanac'h o lezel an dugelezh d'e vreur. Diuzet da eskob Luik, Maastricht ha Tongeren goude merzherenti sant Lamberzh, e astennas e abotolerezh a-dreuz ar Brabant hag an Arduenna oc'h embann an Aviel hag o stourm enep ar stuzioù pagan.

- E 1252, e Sevilla en Iberia, **sant Ferdinand**, roue Kastilha ha Leon. Kenderv e oa da sant Loeiz Bro-C'hall.

Dieubiñ a reas Kordoba ha Sevilla dalc'het gant ar Vaored; diazezañ a reas skol-veur Salamanca; sevel a reas iliz-veur Burgos. Arboellek evit merañ e rouantelezh, e voe gwarezour an arzoù hag ar skiantoù, aketus bepred da skignañ ar feiz.

- E 1431, e Rouen, **santez Janed Ark**, gwerc'hez, kenbaeronez Bro-C'hall.

Hag hi ganet e Domremi e dugelezh Bar e Loren, e voe galvet da-geñver ar Brezel Kant Vloaz gant he *mouezhioù*, eleze sant Mikael, santez Marc'harid ha santez Katell, da zieubiñ Bro-C'hall diouzh ar Saozon ha da lakaat ar roue Charlez VII da vezañ sakret e Reims. Paket gant ar Soazon e voe barnet d'ar marv ha dêvet war ur geuneudeg en Orleañs d'he 19 bloaz.

- En Iwerzhon, **sant Govan**, abad.

- En Iwerzhon c'hoazh, **sant Saer pe Saerost**, manac'h.

- Er VI^{vet} kantved, **santez Dimfna**, gwerc'hez ha merzherez e Bro-Flañdrez.

Merc'h ur roue pagan eus Iwerzhon, e kollas he mamm, neuze e vennas he zad he dimeziñ.

Tec'hout a reas gant he c'hofezour sant Gerebern (Gl. Gerebrand). Adkavet e voent e Geel, e-kichen Anvers, gant kannaded he zad, e voent neuze dibennet ganto.

- Er VII^{vet} kantved, **ar sent Kaidog ha Frikor pe Adrian**, menec'h iwerzhonat deuet da visioniñ er Ponthieu hag e Bro-bPikardia.

Gounit a rejont d'ar feiz ur perc'henn pinvidik anvet Ricarius, a savas abati Centula - hiziv Saint-Riquier - nepell diouzh Ambianos (Amiens), lec'h ma voent sebeliet o daou.

- E Breizh, e 1698, distro da Zoue ene **c'hoar Mari-Mikaela Bouffard**, leanez eus kouent Maria-Lid an Naoned, kevrinourez.

